

SON METIK

ha

KLOAREC KOAT AR RANNOU



War don : *Kurunen aour ha perlez an Itron Varia Remengol*

Karanteza glac'har !

I

Tud yaouank, a Vreiz-Izel didostait da glevet
Ar recit euz va dañlou ha va foaniou kalet :
Me zo eur c'hloarek iaouank a eskopti Kemper
A boa choaset eur vestrez en eskopti Treguer

A c'hars ar mor oun ganet en bro sant Gwenole,
Ha biskoaz nemet glac'har nem euz bed em bue ;
Glac'har a gwir garantez sethu ma flaneden.
Planeden rust a kalet da heuilla pen da ben.

Pa oan em bugaleach, va vam baour aliez
A lavaret d'in : « Va mab, kar a ped, ar Werc'hez
« Ped anezhi, va mabik, ped Gwerc'hez Remengol,
« Mar e fedez a galon, biken ne ni da gol »

Patronez ma mam dener, Gwerc'hez vad Remengol
Ped gwech oc'h euz hu mired da doun me eat da gol
He pedet am euz bepred, breman araok mervel,
E kanin he meulodi d'am breudeur Breiz-Izel

Pa guimiadiz dioc'h va zud pa ziz pell euz ar guer,
Evit mont var ar studi em kollach Landreguer,
M'em boa pemzek vloa, me a wele dourek,
Rag evidon ne oa ken, alas !... a eureusdet !...

O lostaat oc'h Landreguer e kaviz eur plac'hik :
Koant vel eun aelik Doue he hanno oa Metik :
D'ar gouent a ze ive, evel doun d'ar studi,
He c'halonik oa mantret kement a va hini.

« Salud deoc'h plac'h iaouank a lavarinn dezhi,
« Evel d'oun oc'h onkeniet ho kuitat tud ho ti,
« Ho tornik flour em dornik laket gant garantez,
« Hag vezimp eurussoc'h o wela assamblez. »

Ar plac'hik a lavaraz ; « O cloarec Gwenole,
« Pedomp Doue aliez an eil evit eguille
« Er joa kouls hag en anken d'alc'hit sonj a Velik
« Euz a vremen da viken me eo ho mestrezik

« — O Metikik va c'harante, rozen ker Breiz-Izel !
« War ho mignon Gwenole tolet breman eur zel,
« Eur zell digant ho lagad a rañ eurusted
« Keit a ma lezo Doue ac'hanan war ar bed. »

Eru en kaer Landreguer, erru e pen l'on hent,
Me oe kasset d'ar golach, ha Metik d'ar gouent ;
An disparti oa kalet c'huero hag ankeniuz,
An eurusted er bed-man n'eo ket paduz !..

Dre ma chomiz er golach, skeuden douz Metik kez
Eun deiz, enn noz dirason he deue aliez
Neuze pe len Doue ha zent koz Breiz-Izel,
Vit ma vije en e bue, laouen evureuz zantel

II

Pa eo echu va studi en hiz da Rumengol,
Da bedi c'hoaz evit hi gwerc'hez vad *remed holl*
Seiz tro a riz d'an oter, devez ar pardoun braz,
Ha seiz tro d'an iliz zakr var ben ma daoulin noaz,

Goude an offeren bred, o pebeuz levenez !...
Er vered gant he mam gaer e veliz Metik kez
Laouen ei evel an deiz ha koant evel al loar
Biskoaz pennerez ken koant n'euz bet var an douar

Lugerni a re he zal he ziou chod gwen ha ru,
He geno vel eur rosen, he bleo, he lagad du,
Eur groas aour en he c'herc'hen, he c'hoef dantelezet
Lavaret vije eun ael euz an env diskennet.

« O pebeuz joa evidomp va c'hloarek Gwenole,
« En 'm gaout en Rumingol deiz pardon mam Doue
« Mam en holl dud ankeniet, Gwenole ma mignon,
« Evidom e peb amzer he fediz a galon.

« — Metik koant, setu aman eur walen aour,
« A roaz din araog mervel, Anaik va mam baour,
« Doug anezi var da viz, kemer hi digant hen,
« Me dou war goalen ma mam d'ez karet da viken

« Ar groaz aour zo em c'herc'hen a vo dit Gwenole,
« Eur guchen euz va bleo a roan did ive ;
« War ar groas e touan ha dirag ar Verc'hez
« E vit karet gant Metik tre ma vo en buez. »

Ha daoulinet en iliz, hon deuz gret eur beden,
A roet evid offrans eur c'houriz koar melen,
Beniget ho medalen, poket da relegou,
Da relegou Sant-Briek karet gant hon tadou.

Goude hon euz baleet hon daou dre Breiz-Izel,
Ho guele kalz ilizou ; kalz a douriou uhel,
Abatti Landevennec, ha mor Douarnenez
Lec'h ma oa ker Is hag or princes Ahez.

Gwelet hon euz menez-hom hag iliz veur Kemper
Mene-bre, iliz Bulat hag hini Landreger,
Kastel-Brest Sant-Yan ar Bis, iliz Salaun-ar-Foll
A kaera tour zo er bed, tour uhel Kastel-Pol

Gwelet hon euz Keraez, Kemperle Pon n'Abat,
Fouenan bro ar merc'hed koant, Gwengamp ha Huelgoat
Montroulez a Lannhuon, Kroson ha Lesneven,
Kallak, Bro ar gourino, Kastellin, Rosporden.

Klevet hon euz e krosal ar mor e beg ar raz
Biskoaz den n'antreaz eb aoun pe c'hlaez,
Bet omp en enez Sizun, en Roueseaz Molenez,
En enez Vaz, er leoded, ive er Seiz-Enez,

Eur bloavezh omp bet euruz evel aled Doue.
A setu lec'h pa'o guele an oll o lavaret ;
« Setu kloarek ar ranou soun evel eur derven,
« Setu Metik, e vestrez, fresk evel eur rosen. »

III

Devez pardon Sant-Herbot, e klevis eur c'helou
En euz beuzet ma c'halon en eur mor a zaelou,
Gant e zad ha gant he mam d'am mestrezik Metik
E oa choaset da bried eur Pagan pinvidik.

Ar pagant se oa diot hep furnez, hep skiant,
Ne gare war an douar nemet ar gwin ardant
Metik paour pa e gwele a grene gant ankrez,
Hogen, he zud oa dallet allas ! gant an danvez !

Mont a riz prim de gwelet neuze da Gerzanton,
Dre ma tostaen em c'hreiz a grene ma c'halon ;
War dachen ar bourk e son e oa ar biniou
Tud an eured ha metik beuzet en e dælou.

Metik a dreuz e dælou a reaz ouzin eur zel
En eur lavaret : kourach ma mignon fidel !
Monet a ra d'an iliz lavaret ra d'ar belek :
Gwenole eo a garan hag hen vo va fried !

Koueza ra-ze d'an douar raktal ar bennerez
Ha douget e dioc'h-tu euz an iliz e-mez.
Dispak he c'hoef, e dillad ha dispak e bleo ;
Seblantout a ra beza eun aelik paour maro.

Mantret oll gant ar glac'har e koueziz d'an daoulin
En eur grial : O Metik zell a drue ouzin ?
Pokat a riz d'he dornik d'he diou chod, d'he c'herc'hen,
O Metik ! Metik ! Metik ! pehini a garen !

An disesper en dro din, evel eur vantel blom,
A gassas pell ac'hanon, pell war zu mene-hom
Va skiant a zo kollet va c'halon a zo ien,
O Metik ! Metik ! Metik ! pehini a garen.

Eiz te goude azeet e-kreiz koat ar rannou,
War va diou chod a rede diou feuntan a zaelou.
Pa gleviz e Rumingol o son hanter noz,
E lavariz esklamet : « va Doue deoc'h bennoz.

« O gwerc'hez vad Rumingol, selit ouz va glac'har
« Aman oun deut da vervel breman war ho touar
« Varc'hoaz, pa savo an heol arc'hantet en envou
« Dindan an derven goz me a vo kavet maro !... »

« O Metik, va dousik koant, pehini a garen,
« Kenavolaran d'id er bedman da viken.

« Gant ar maro unanet ni c'hoaz en 'm garo,
« Kenavo er barados, kenavo ! kenavo !!!... »

IV

An de varlec'h da sav heol, eun durzunel hep par,
A hirvoude en derven he c'hlemmou a glac'har ;
Ar c'hloarek a oa maro allazgant an anken
En eur lavaret *Metik ! te pehini a garen !*

Ar c'hloarek iaouank a starde c'hoaz he vuzellou
Kroaz aour ha bleo du Metik glebiet gant e zaelou
War an derven doa skrivet hano e garante,
An diou galon unanet treuzet gant eur c'hleve,

Kaset oa bet ar c'hloarek da vered Rumingol,
Ha sebeliet e disheol iliz zakr Remed holl !
Illiz patronez he vam he deuz bet ken karek,
Tud iaouank a Vreiz-Izel, pedit vithan bepred.

Sethu eta Gwenole en e wele douar !!!
Eur miz goude eo klevet huanadou glac'har...
Eur plac'hik gwisket en du en bered Rumingol,
Dond di da bedi Doue ha gwerc'hez Remed holl

O tremen dre ar vered, velas var eur men-be,
Skrivet neve flam hano e mignon Gwenole,
E-pad an noz daoulinet, Metik wele dourek,
Ha d'ar men be e poke, e poke kalonek.

« O Gwenole emezhi, setu te en repos
« En douar zakr Rumingol, ez out deut d'am gortoz
« Me ken ma strako an de o ma muia karek.
« Er be man, dre zorn Doue ni vezo unanet !!! »

Da sav heol, eur belek koz, vond da bedi Doue,
He c'havas hanter varo gourveet var ar men-be ;
Rei a reaz d'ar plac'hik paour absolver ha pardoun
Metik varvaz laouen raktal gant ran galon...

En eur vogeden esans ene gwen Metik kez,
Vel eur goulmik a nijaz d'an Env gant an aelez ;
Euz a varadoz Doue eur goabren arc'hantet
War Tour illiz Rumingol, neuze zo diskennet.

War ar goabren ar Verc'hez ha sent koz Breiz-Ize
Deuz kurunen Gwenole, hag e vestrez santel
Barzed an amzer gwechall drant war o zelnou
Da Zoue en brezonek e gane o gwerziou.

Sebeliet e korf Metik, kichen koat Gwenole,
Ar maro deuz unanet an eil gant egile.
Eur c'hloarek karantezuz deuz var o be skrivet
Ar c'homzou truezuz man, gant e zaelou mesket

« Aman repos en peoc'h Kloarek koat ar Rannou
« Den a seiz hag a galon, den a garie er vro ;
« En e gichen eo kousket pennerez Kersanton,
« Metik an aelik Doue, maro gant ran galon !!! »

O Gwerc'hez vad Rumingol, setu o taou bugel
Kousket en tal oc'h iliz ha dindan ho c'haskel
Vel eur vam karantezuz war gavel o mabik ;
C'houi dolo evez war be Gwenole ha Metik !!!

Kleir, ougrou Rumingol, truezuz c'houi zono ;
Barzed ha pelerined dælou c'houi a skuillo,
War be Metik Gwenole, pa refet ho peden,
Eur beden a garante ha karget a anken ?

Bevit en doujans Doue, tud iaouank Breiz-Izel,
Pedit Gwerc'hez Rumingol evit ma viot santel ;
Sonjit ive e metik, sonjit e Gwenole,
Bezit evel-te fidel an eil d'egile.

Yan Ar Skour.

HISTOR ADMIRABLE



DEMEUZ

AR BOUDEDEO

Pehini aboue maro hor Zalver, ne ra nemet bale noz ha deiz ac'hann da fin ar bed, abalamour d'an effronteri an devoa bet en andret hor Zalver Jesus-Christ, pehini, pa voa o vont d'ar maro a faivezaz dezan diskuiza var e stal, hag e feuz d'en rebuti evel eur scelerat.

Var don : GWERZ SANTEZ-ANNA

Asistanted enorabl, tostañ da glevet
Ar vuez pitoyapla a voe biskoaz ar bed ;
An histor zo truezuz demeuz ar boudedeo,
A zo noz-deiz o vale aboue hor Zalver maro.

Kuz a tribu Neptali, ha ker Jerusalem,
Voa ganet Absarius, karget a anathem ;
Dond a ra ar bed-man en amzer Herodes,
A felveas masakri Jesus, Mab ar Verc'hez.

Va zad a voa eur c'halve, va mam kemenerez,
Hag a laboure en templ da ober broderez ;
Ha va c'herent am deskaz da len leor al lezen,
Hag hini ar profetet ivez a dra serten.

Goude e voen demeet gant va c'herent afin,
Da eur vreg fur ha prudant a tribu Benjamin,
A bini 'm boa tri bugel en amzer ma teuz
Aotrou Sant-Yan Badezour d'annons ar messias.

Sant-Yan a gonvertissas kalz euz ar bañaned
Pere voa idolaret, kaledet er pec'hed :
Dek mil den en eun devez en devez badeet
Me, va greg, va lugale e voamp bet o velet.

Va greg a lavaraz d'in : va fried emezi,
Lakomp en em vadezi, ennont e ar Messi
Ha me o respont d'ezi gant eun ear direspet :
Na ni nak hor bugale na vimp ket badeet,

Aben eun neubeut goude Sant-Yan voe dibennet
Dre urz roue Herodes eun den kruel meurbet,
Ha ma teuz hor Zalver evit ren en e blas
Hag a raz dre ar c'hanton kalz a viraklou braz.

Klevet e meuz bet Jesus alies o sermon,
Hep ne meuz bet profitet euz e bredikation ;
Va-unan e voa presant p'en doa rassaziet
Dek mil den, gant pemp para ha goudeze pesket.

Me Boudedeo maleurus a velas c'hoas souden
Jesus o ressusita Lazar, breur Madalen,
Ha guelet dibossedi kalz a dud possedet,
Ha sivoas din pec'her bras, ne meuz tam profitet.

Aben eun neubeut goude voe Jesus kemeret
Gant kalz euz ar Judevien er jardin Olivet,
Ha kondaonet gant Pilat da rankout da zougen
Ar groas pouner ha mezuz evit ar bec'herien.

Pa voe ar groas achuet, hor Zalver voe samet,
Da vond da venez Kalvar da vit krusifiet
O velet an dud o reddeg me gemer ma bugel
Ha me o vont da dal an nor pa ie en da vervel.

Setu Jesus o tremen neuze abiou va zi.
Pehini en tal va stal a deu da reposi,
Ha me lavarar dean gant eur gomz arrogant
Ke alesse euz va stal te zo eun den mechant.

Ganez eun desinoret gant da ifronteri
Pa o welan o reposi aman 'tal va zi ;
Kerz alesse den ingrat koz, sorser miliget,
Kerz alesse d'ar maro pe c'heuz he merited.

Jesus a respontaz d'in gant eur vouez truezuz :
Mont a ran da bartia, den fal den maleuruz,
Me reposo gant va zad, te valeo bepred
Dre bevar c'horn ar bed-man ac'han da fin ar bed.

Ia te valeo a c'han d'ar jujamant.
Hag e c'hoste deo d'am zad am velo suramant
O varni ar berc'herien pere voa kondaonet
Da vont d'ar flammou gries ar re just d'ar joauset

Pa gleviz komzou Jesus, va c'halon vo touchet
Ha me rei va bugale eun istant d'am fried,
Ma velis ar Veronic o sec'hi bizach Jesus,
Ha chom en e mouchouer e boltred truezuz.

Heb c'hellout n'em arreti e c'heuillis hor Zalver.
Hag e velis va Jesus ha kalz gragez santel :
Ar bourrevien d'ar Verc'hez o devez lavaret :
Setu ama an tachou ma vo o mab staget.

P'am boe guelet hor Zalver o vervel var ar groas
Ekreiz etre an daou laer karget a boanniu bras,
Ha me kommans va beach gant kalz euz a anken
O tond da laret adieu da gear Jerusalem.

Sonjit 'ta Bretoned pegement a c'hlac'har
En deuz ar boudedeo brema var an douar !
Rankout kuitaat e gartier e wreg e vugale,
Hep kimiadi diouto evit atao bale.

Pa en devoe baleet eun nomp a vloaveziou
E erruaz en Egypt pell braz demeuz e vro,
Eno e ma ar Mor Ru elec'h moe tremenet
Moyses gant pobl Doue hep kavout drouk ebet.

Mon! a riz euz ac'hane da cnezen Candi,
Elec'h emedi en noas an dud a zo ennhî :
Eno e velis eun tad o troc'hi a dammou
E verc'h evit sakrifiks da rei d'o doueou.

Mont a ris da Malhodo e pelec'h e zeuz tud drol,
Pere a ador Doue hag an diaoulou holl ;
Pedi reont Doue da gaout prosperite
Hag an diaoul a bedont ne rai ket drouk d'eze.

Guelet e meuz er Japon eur vam meurbed kruel,
Hi deuaz da laza, siwas e daou bugel
Er vro-ze e permetet laza ar vugale
Pa n'o deuz ket a vara da rei d'eze.

Goude kemeris an hent da vont d'an Enezi,
D'an Amerik d'an Asie ha neuze d'an Turki
Ar gragez euz ar vro-ze a vale d'an arme,
Hag an esac'h o deuz soign demeuz ar vugale.

Eno emedi ar c'hiz da laza ar baotred,
Nemet unan dre famill ne ve james miret.
Be a zo eur rouanez a ro komandamant
Da laza an holl botred hep kaout de nep damant

Eur ger euz ar garniol euz eur c'hiz drol meurbed
Rak eno an dud iaouank pa vezon eureujet,
E renko ar vreg iaouank nos kenta e eured,
Mont da gousket gant ar Prins vid bea enoret.

Bet on ebarz eur c'hoad hanvet Cisarín,
Elec'h ma c'heller bale kant leo d'an neubeuta
Hep kavet dour da eva na feunteun na rivier,
Ar pezh zo goal inkomod da holl dud ar c'hartier.

Monet a ris c'hoas pelloc'h da gear a Vosopa
Pini zo euz e divoal eur prins euz an drola :
Ur vanden chas ha merc'hed en deuz evid gardou,
Ha n'en deuz ken soudarded evit difen e vro.

Ac'hane 'yis da eur gear hanvet Estopet
Elec'h ma zeuz serpentet ha loened vil meurbed
Zo ker teo ha korf eun den sur ma ven mesuret
O deveuz d'an neubeuta daou ugent troated hed.

Er spas demeus a gant vloaz ez on bet o vale,
Ha me erruout adare em bro hag em c'hontre ;
Allas ! maro voa va greg koulz ha va bugale,
Ha den abet euz va bro serten n'am anavee.

Neuze e teuis da Rom ebarz an Itali,
En amzer-ze a oa kalz a c'hlac'har enni
Guelet a riz merzeria nomp braz a gristenien,
En defot na renonsent d'o feiz ha do lezen.

Me a vale var mor koulz a var an douar,
Ha me pariel neuze evit ar Frans, bro rar ?
E Marseil, Bourdel, Paris, Niort, Naoned Lyon
Ac'hane da Vreiz-Izel, da gear vrao a Raozon.

Guelet e meuz Montroulez ne voa nemedeur c'hoad
Ha guelet Brest ha Kemper ebarz an douar prat

Ha guelet ar gear a Is en e frosperite
Hag ar gear a Lexovi a meuz guelet ive.

Guelet a meuz Breiz-Izel en koat ha menezioù,
Ma zoat evel sovajet nevze ebarz er vro ;
Me a vel kalz a gearioù er vro-se batisset,
A ra kalz a chenchamant abaoe ma zon bet.

Me vel ar gear a Raozon eur gear gaer batisset
Dol, Gwened ha Sant-Malo, Dinan hag an Naoned
Sant-Briek ha Landreger, Lannion Montroulez,
Kastel-Pol ha Lesneven, ha Landerne ivez.

Ar c'hearioù-ze meuz gwelede koat hag e prajou
Pa deuis d'ober va beach kenta ebarz er vro ;
Setu batisset Kemper Brest ha Rekouvrans,
Kemperle Moelan Keraez ebarz en assurans

Anfin pa oan kondaonet gant Doue da vale,
Me zo bet 'n em gavet e-kreiz meur a arme
Kanolioù ha fuzulioù, clezeou sabrennou,
Netra ne de bet kapabl de rei din ar maro.

Bet oun ebarz en listri a zo bet perisset,
Hag an dud a voa enne a meuz guelet beuzet,
Ha me hanvet Boudedeo n'em bije drouk ebet
Komzou Doue a renko bea akomplisset.

Kondaoned e zon gantan da chom var an douar
Komprenet holl kristenien hema zo din glac'har
Va zourmanchoù er bed-man biken na echuo
Ken a deui Doue da varn ar beo hag ar maro.

Ar som euz a bemp gwennek zo em godel bepred
James ganen ne seurt klenved ne deu d'em ataket
Bet on ebarz ar vroioù elec'h moa ar vosen,
Hep na zeuz staget ouzin na klenved nag anken.

Va boutou na va dillat james na uzont ket,
Dre bermision Doue a meuz bet ofanset
Peder gwech a meuz redet pevar c'horn ar bed-ma
Ha guelet a meuz ive kalz chenchamant enna.

Brema e zon komanset da redek ar bemped
Hep ne don ambaraset gant dibri na kousket ;
Guelet a meuz broioù zo bet holl revinet
Ha kalz demeuz ar gearioù gant ar gurun devet.

Ne meuz bet kalz amzer evit chom da barlant
Me a gred e ma va zreid vargore glaou ardant
Nan, ne zeuz nemet Doue a elfe diskleria
Ar boannioù braz a soufran kerkent ma reposan.

Pebeuz maleur e din-me bea bet rebulet
Demeuz a guichen va stal Jesus Salver ar bed
Pa voa o vont d'ar maro, da zond da ziskuiza
Ha me neuze dre valeur a zeuaz de zispriza.

Ema e ar maleur bras a meuz var ar bed-ma,
Emon atao o vale ouspen trivec'h kant vla,
Ha c'hoaz e renkan bale a-c'han da fin ar bed :
Pedit Doue evidoun ma zin d'ar joausted.